

Dom lan ar C'haro.

Mari Rene a lavare
De zad a de vam eun de a we :

– Ma zat ma mam ma dam c'heret
Da klask eur bellek din e c'hefet.

Klasket dime Dom lan ar C'haro
Rag me zo er parail ar maro.

Ar Rene koz a pa klevas,
D ar bourg Langoat prompt e heaz.

D'ar bourg Langoat pa e arriet
Dom lan ar C'haro neus re(n)contret :

– Dom lan ar C'haro me dam c'heret
Da kovez ma merc'h gant in deufet.

Deud tu ganin, Dom lan ar C'haro
Rag eman er parail ar maro.

Mari Rene a lavare
Da Dom lan ar C'haro pe salude.

Dom lan ar C'haro ma dam c'heret
Kasset ma korf paour er porchet.

O korf er porchet ne ai ked
An escop na permetfe ked.

An escop na permet fe ked
Ne ai ked o korf en porchet.

Pa hez Mari Rene en douar
Eur goulmik gwen voar lost ar c'har,

A dre e c'houibant e deus laret
Kas Mari Rene er porchet.

Er Bourg Langoat pa int arriet
E zoul a voa groet er verret.

E zoul a voa groet er verret
Mari Rene ennan zo laket.

Mari Rene ennan zo laket
An tud en dro a zo daoulinet.

An tud en dro a zo daoulinet
Pevar el gwen a zo diskennet

Pevar el gwen a zo diskennet
En Mari Rene int kroghet.

En Mari Rene int kroghet
Da gas e horf paour er porchet.

Kri e viche ar galon ne voelche
Er Bourg Langoat neb a viche ;

O voelet tri den ag anter kant
Mervel en eun interamant.

Nag ar person zo manet klan
Ne hel na dibin na efan.

Au 37 recto, seulement le titre écrit à l'encre par Penguern : Dom lan ar C'haro.